


NIV 5





TARZ

(Ma krog zriñat ar c'hiz skriveñ,
Arabat displeganñ ar hira
Penaos e varetz da gi war al leuz.
Jellat (Pouchindour).)

Gwraet ez eus bet eus
an dastumadenh-man
kant skouerenn niverennet
a 1 da 100

NIV 20



Kasit ho dizhiri da
ROHANN JOLAIS
40 rue de BRETAGNE
PARIS (III)

W A R - D U A R P A L
=====

Pa darzh un tarzh nevez a-ziwar un wezenn e c'heller diogeliñ daou dra : un arouez a yaouankiz ez eo - ne c'heller ket ober diouzh ar skourr ur wezenn nevez. Arabat deomp-ni ivez disrannañ hon TARZH nevez diouzh an Emsav. Hogen ober diouzh an dud o deus labourer evit Breizh en hor raok ha derc'hel gant an erv. N'hon eus ket da sevel un Emsav evel e maread kentañ Breizh. Atav, met da genderc'hel gant an hent a zo bet diskouezet deomp. An hent nemetañ eo evit monet war-du ar Pal.

Pa lavaromp an Emsav e fell deomp komz eus an Emsav Broadel nemetañ. Arabat bezañ touellet gant ar c'hrak-Emsavioù gwan ha gwak ha gaouiat. An Emsav Broadel n'eo ket hepken evit ar yezh pe evit an arboellerezh. Ar Pal nemetañ a zo deomp da dizhout eo ar Frankiz, Frankiz hor Bro.

Ar pezh hon eus da ober evit bremañ hag ar pezh a ven vennomp ober eo ul labour start. Amzer n'eus ket da goll. Mar manomp da c'hortoz, hon enebourion a denno o mad eus hon diegi. Deomp-ni da vezañ ar re greñvañ hag e teuy an trec'h ganeomp.

Ar stourm evit ar Vro a rank kregiñ ennomp. Ar gwir Vreizhat ne vev ket evel un den trec'het. A-benn kaout Reizh hor Bro, ret eo deomp bezañ rez hon unan.

Bremañ e kav deomp eo poent bras d'ar re yaouank skoazellañ ar re henañ. Ar re o deus deraouet da labourat evit Breizh ne vevint ket bepred. War bep tachenn e rank ar re yaouank monet gant hon araogidi a-benn bezañ stummet gante

War niverenn diwezhañ TARZH hon eus klevet anv eus Strollad an Deskadurezh Eil Derez. Ar blijadur vrasañ a c'hellfemp ober da saverion SADED e vefe labourat a-zevri gante a-benn stummañ hor spered e brezhoneg.

Spered hor c'helaouenn a zle kavout amañ e ziazez.

Pal pennañ hor c'helaouenn eo reiñ da Yaouankiz Vreizh ur mennoziadur kenelel a-benn sevel ur Framm Stadel.

Ar POELLGOR.

K A N - B A L EWar don "John Brown's Body"

I - Paotred, deut d'ar stourm dindan banniel ar Vro (3 gw.)
Hag e vevo Breizh atav.

DISKAN : Evit Breizh ni 'yeñ d'ar brezel (3 gw.)
Ne c'hell ket hor Bro mervel.

II - Uhel en avel e stlak ar Gwenn ha Du
Soudarded sav a bep tu.

III - Dihunet ar bobl gant galv ar yaouankiz
Setu deut eur ar frankiz.

IV - Evidomp neuze e skedo tarzhañ an deiz
Ur vro vras e vezo Breizh.

V - Gonezet e vo evit ar Vretoned
Peoc'h ar Frankiz adkavet.

REIZHADURIOÙ D'AN NIVERENN DI EBZHAÑ

S.A.D.E.D. : chomlec'h ar C'Hreizenner hag an disklêriadurioù
reñañ a vezo kavet e dibenn an niverenn-mañ.

Pediñ a reomp hol lennerion da reizhañ kement-mañ :
DOUARCURIEZH , gant KERVERZHOÙ ha Pêr DENEZ a vez gwerzhet 4,00 Lur.

Ur chomlec'h da anavezout evit pep tra a denn d'ar gelaouenn :
Ronan JOLAIS - 40, rue de Bretagne - PARIS (III°).

Kasit razh ho pennadoù hag ho lizhiri dezhañ.

S E V E L U R V R O A D ?

=====

gant a r G O U R C ' H I
troet gant A b E n n e z

- Y E Z H - P L A E N -

" Ha krediñ a rit en devez an hini a gantre
sioul en unan eus al liorzhoù-se a anver
rouantelezh , ur vuhez plijusoc'h eget an
tec'had a ya a goad da goad hag a roc'h
da roc'h leun e galon gant ar goanag
sevel dezhañ ur vroad ? "

LAMENNAIS

S E V E L U R V R O A D ?

=====

gant ar GOURC'HI

troet gant AbEnnez

+
+ +
+

"Gant piv 'ta 'peus bet an traktoù-mañ ?" a hudas ar poliser ruz ha tev, war-bouez tarzhañ en e zilhad displiv, e voj o tonet maez ur roched damlous ha damzigor.

"Respont a ri ya pe gaoc'h ? ... Ne gomzi 'met rak ur breutaer, se n'eo ket gwir, lezenn 'bet ... p'lec'h 'peus gwelet se, 'zioc'h da brenestr ? Ur c'hailh out 'ouzez, 'm eus ket aon ragout !"

Gant mor gourdrouzoù ar roñfl darev da skeiñ e kandre war gweuz hirik Ner-va un daerenn-luc'h. Ar par amventek ha kouek dirazañ, ar c'horf kovan° a luske en un hunvre - diwar allazig ur gizenpad vlev c'hell hejet war e dal spelc'het - anal kreñv ha flaerius al lakepod.

Un eil gour, ur fondenn ruz gantañ, a nesaas diwar c'halv an hini kentañ a fuc'has : "Setu aze, diveget 'deus ar re 'rall, n'eus 'metañ o tortal, mar karfe sachañ e gilhorou gantañ, aes e vefe ..."

Aes, aes, en drivliadenn yen o sevel gant ar morzhed hag a-dreuz korf ur yacuaer da zantañ e vrennid levn ha tomm.

Aes, evel al lutig glas hag ar goulevier oc'henaouiñ etre pennahelioù an empenn.

Aes, ha neoazh ne rannez grik !

Diouzh ur beurevezh klouar gant avelioù ar mor am eus da welet, ar wezh kentañ din-me ; edos ur paotrig atav o vonet da c'hour, un draezhennig peg ouzh da c'har e noazh.

Komzet am eus ouzhit, gwennc'hoarzhed ac'h eus ha da c'houde n'ac'h eus sanet poz. Aon az poa rak ar gerioù.

Deuet e oas a-bell bras a-ziwar an arlu, hañval ouzh ur werzenn-droc'h distroet d'an hengoadeg.

An draezhennig-mañ ouzh da c'har ha marteze ez plev, tir diuzet gant an avalpinegi c'hwekañ , a oa anat war da izili evel da vamm.

Bernout a rae dit stekiñ ouzh an douar-mañ da vezañ banalenn ar goanag - ar frond anezhi a garan ... Da viken az po adkavet buhez ha marv da voud. Da gorf a-bezh hiviziken a oa gronnet d'am c'harantez. Goût a raen pep tra war da zivoud. Un ene ne oa ken deomp, breuder e oamp e kenunvaniezh an douar-mañ.

Deredek a rae ar Gendiskulierion davet an Ti-Kêr en ur c'harmañ :

"Divac'hit hon tud ! Divac'hit hon tud !"

"Skoulm-yod" a voe gwraet gant an Isprefed ouzh an enseller ne c'helle tennañ netra digant ar "mousig-se".

'Peus ket aon ?" a wic'has an aterser.

Sonn e kouezhe c'hwezh ar spont war divskoaz ar paotrig. Euzhet e oa ar c'hroc'hen gell.

Mouez troazh ha holen-moger, kaoc'h ha stronk, degaset gant an avel-sil eus ar c'hevioù hag an toullou-bac'h. Aer flaerius, dic'hellus da zivoueziañ gant heol miz Eost, teuzet en ur dremen gant c'hwezh ha dianaladur heugus ar "marstrellad" (e gl. e oa gwraet gant ar ger luc'hek "nervi") ar gourel-
ezh anezhañ a lakae dassonioù kevrinus da sevel e korf ar paotr.

C'Hwezh ur gwent arall o tougen aezhennoù glan, kaouad mouezhioù ar Gendiskulierion a zeue da vete ar paotr o lakaat an nac'hañ da sevel ennañ.

Ur c'hoant rinel a empenne ar paotr da ober dioutañ ur gour, ganet d'ar Rezid°. E bruc'hellerezh an dispac'h, flac'hataet gant avel an trec'h, c'hoantaat a reas evit ar wezh kentañ ar Skleurenn.

Ha gwelet ac'h eus va c'harantez evidout - an deiz kentañ az kwelis ? A-raok zoken pa oa anat din piv e oas ? Ha neoazh a-vec'h m'em eus kredet damziskouez dit dre ur barzhoneg kamm pegement ez karen. Hon flourigoù a voe rouez, goar n'eus ket gant an dispac'herion da vezañ tener evel bourc'h-
izion oc'h en em garout, hogen plijadurioù kevrinleun ar c'houlzadoù didrous e-doug ma sellemp ar gwez hag an oabl, a voe eured hon daou ene unanet.
hep mar

Va muiañ karet, tevel a rez, met gouest e vezan da ziavezañ ar gerioù a van e diabarzh da galon hag a sorc'henn da ugent vloaz o tonet :

Anaout a ran ar stourm a grog en da galon

Anaout a ran pep tra war da zivoud

"Pa'z out ganet e kilstourmes endev

Peogwir aba ouzhpenn pevar c'hant vloaz

Preizherion a zo deuet
 Aloubet o deus hon tir
 Aba ur c'hantved
 E vougont hon ene
 E reont fae war hor yezh
 Aba ouzhpenn pevar c'hant vloaz
 Ouzh o c'hanolioù, o archerion
 E lakaomp hon hunvreoù
 Hon daouarn e noazh
 Hag a-wezhioù e reomp gant hern hor sklavelezh
 Aba ouzhpenn pevar c'hant vloaz
 Paotred gaer o lagad boull
 O brennid kadarn
 A ya da vervel rez
 Gwezh a vez
 Diouzh ar mac'her-se."

Bonaezhet° gant kig den ha netra ken, e lavarez ar c'homzoù-se doujus
 hag e savez a-enep da wask an nerzhioù gadal ha teñval merzet gant nikun
 ha gwelet ganit-te !

"Aba ouzhpenn pevar c'hant vloaz
 Nag a vac'hioù, nag a vleizi
 Da arvariñ en aner hunvre hon c'hwezek vloaz,
 Drougiezh ha divalavder.
 Aba ouzhpenn pevar c'hant vloaz
 E noazh ouzh an heol, melegan en avel
 E stourmez enep nerzhioù an noz."

E-pad ambren an dispac'h ha striv an emstourm, gorre da groc'hen a vez
 gwalc'het gant dour krighus da c'hwez. Tapennoù trenk a zeu war va diweuz
 d'am entanañ gant da gonnar.

Strimpañ a ra d'az daoulagad daeroù a zo skarzhet gant ar glav war an
 hent bras. Daeroù lemm ha taer ez int, holen ez int, doureier ar Neuvor
 ez int o c'hlanaat Tir an Denion.

Ha da ene glanaet, da gorf kleizennet a zasson - a^Delenn vurzhdus -
 o seniñ Neulgan dreist-kened dispac'hoù :

"Aba pevar c'hant vloaz !

War zouar ar brugevier m'emañ enlouc'het da gorf, en eus savet tri zi.

Gant rusk ar vezenn-groaz e veze gwraet ar mogerioù anezho hag an doenn gant deil ha gwreskoù ... En o c'hichen am eus bet sershaet peulvanioù kalc'hel ha pikernioù meinigoù. En arouez-mañ, heñvel ouzh trec'herion ha rouaned a-wezharall, am eus bet sonnet ur geoded nevez gouestlet da glod va muiañ karet. Hon selloù kroazet a yeas da drigañ° un drebad a voe deomp peurbadel-ehz en tiez-c'hoari aliet d'az c'hoarzh. E hud-kelc'h ar steudad boemus hon eus lidet un Himen marzhus.

Un deiz a glod hag a varv. Gwraet hon eus gloezioù° santel. Ne oa ken ar paotrig, distag e oad da viken diouzh dadad. Lezenn Tewezeg ar ... aañ a roe e Reizd° d'az bloaz warn-ugent ! Hag en deizioù war-lerc'h aet out diouzh ti da dad.

Pa luc'h ar vrogonenn dallus emañ ar mammoù kozh o c'hortoz an taol kur-un da verkañ hed o hun diouzh dilec'h an taran. Pa em gemmesk ar skleur gant an trouz emañ ar maen kurun warnomp. Ennout em grenne evel-se holl dan ar barr-amzer. Devet ac'h eus neved da gounioù, aet out war an hentoù.

M'emaout gwir vab da dadoù ec'h emsavi bepred.

En da vreuder ac'h eus c'hwezhet da anal boazh, brokus out bet da reiñ dezho Kâs ar mac'herezh.

Hag heñvel ouzh da arvell da veli dadad, ac'h eus diavezet e lizherennoù bras du pe wenn war an hent ha war ar mogerioù an daonedigezh a vo da ziwez da ren hor mistri, d'o lezennoù, d'ar vuhez mevel ha keheler taolet ganto warnomp.

Youc'het ac'h eus war an hentoù n'eo ar pezh a lavarar a zo hor mad hag ar vadelezh nemet droug ha drougiezh ha drougelezh. Hag an darlaskerion, gwall-arouezioù d'ar garantez klufan ha d'ar vroad diwir, ar re-se a daol bec'h warnomp oc'h em lakaat da vevel gant hor mistri a ra fae outo, ar re-se a ev eus hon gwad hag eus hon c'hwez e hanafioù aour laeret : boc'halet ac'h eus anezho !

E korc'hwezad ar gonnar, da veved, da galon ha da ene o deus liñvet an tan ha n'out ket bet devet. Glan ha kovan out, tan out.

Dan wareg an noz ouzh ar gouloù gwenn ha yeno kannañ lien an deltenn hag o niveriñ delioù an gwez, ar yaouaer a bleg e gorf evel ma ra da gentañ ur c'hrouadur war-nes genel.

Pep elfenn eus e gorf a zaskren goustat, er c'herreizh adkavet, evel Telenn-aour kanerion ha barzhed an amzer gozh. E gorf a-bezh a delenn bommoù rinel kanenn ur garantez anterin enskuilhet.

Skeudenn e vreuder ha pep tra a denn da dreistweladurezh e ene a zo livet war daolenn dreuzwelus e spered moredet. Tridal a ra c'horf kaer ha divorzhedïñ, dihuniñ a ra distanet; goulaouet gant ar Gened.

Peogwir en tu-hont d'ar stourm, ennout emañ karantez ha kened a vennez lakaat da lev evit an holl Zenion, eb tu 'rall da harzoù da Vro a vennez diyeviañ. Tizhet ac'h eus ar Gouloù; Gouloù skedus out-te! Stouet diragout; e taspokan da'z divesker, me a zo da veleg uvelañ ha deolañ eus ar gravez kuzh savet ganin da zougen bri dit-te.

Diwall, bugel milliget ar stourm, te da-hun a oar :

Gouloù a zo ennout, hogen ur c'hleze a zo harp ouzh da vrennid. Nerzhioù gadal an noz em sav enep da'z trec'h. Huderezh-ifern eo a voe taolet war an Menvro gant an dek kant gwrac'h an diaoul e deizioù an diskar; Ar brezelour glanañ a lamas ar strobinnell, goude dezhañ bezañ bet ruziet e vrennid hag e galon. Diskaret eo nerzhioù an noz. Hogen setu int oc'h aspediñ Doue ar Gouloù. N'int ket hepken o menel e kevioù spontus hon gwaskerion, emaint ennout: em zalc'het int bet e kell al Levenez a zo ac'hanout. Mirout a rint ouzhit da huniñ. Gouzañv a rez o vezañ ma ne vez ket anavezet an doan gant ar boudoù teñval. Kaer-kened ez out. Da garout a rin da viken betek ar Beurgarantez.

Nerva, ouzh penn an daol, a ren ar c'hendalc'h gant dek kile o deus e heuliet tre betek an atant marv-se, kuzhet er strouezh ha kaset da drantell gant e gomananterion.


Er porzh ouzh lein ur wern e nij en avel banniel an dispac'h.

Bourret en deus el lec'h-se diwar ar sell kentañ, evit an irienn a venn sevel. An dachenn dilezet-se, keoded ar re gozh o vonet da get, a zo dihonet gant ur rummad nevez. Kavout a ray e nerzh-rin e kev ar marv da vonet d'em gannañ ha da flastrañ ar re o deus he lakaet en argoll.

En oaled kozh, ur selamm keuneud banal a goroll dirak ar vein du. Flammijenoù a nij tre betek penn Nerva o c'has larkoc'h gant un taol-dorn. Gant-se e tiskar ur pod-pri kozh a dorr... Yen an dour a ver, o soubañ al leurenn zu.

Sevel a ra mouezhioù an iriennnerion hag em gemmeskañ gant aezhennoù diwelus en aer c'hleeb hag er voged vougus. Na kemmet int, ar baotred-se: gour int bremañ! Daou anezho a zo barvek, unan a zo deuet tev, unan zoken a zo deuet tev, unan zoken a zo o vonet da zemeziñ.

Izelaet eo o youl taer. Ne vo nemet gant gwidre e vo gellet sevel un emglev goude divizoù hirbqd. Eus ar re a em ouestl, meur a unan n'o deus ket kredet bezañ didro evel an hini en deus nac'het. Tec'hout a rint. " Difonn " ez aint. Deuet fur, e vezint evel an "dud onest", dilezet ganto " fazioù o yaouankiz ". Bez ' e vezint gant ar re niverus " Loened diskiant a zalc'her er c'hrevier, a vager a-benn labourat ha goude, pa goshaont, a lartaer a-benn debriñ o c'hig ..." (LAMENNAIS).



S.A.D.E.D. A OAR ...

=====

KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN.

Er bloaz-mañ ar c'hamp a zo e kreiz an douarou, 6 kilometr diouzh Langoned, e-kichen ur manati.

P'hon eus kemeret ar c'harr boutin evit dont, tri c'hard an dud a oa e-barzh a yae d'ar C'Hamp. Al lec'h tostañ eus ar c'hamp war hent ar c'harr a oa ur vilin-dour. Ar blenier a oa gwall-souezhet p'en deus gwele let tost an holl dud o tiskenn el lec'h gouez-se.

S.A.D.E.D. a oar ... met ne lavar ket. Setu gerioù gwall-gevrinus. Kle Klevet e vez er skingomz gerioù dispac'hel, da vareoù 'zo hag e-pad pemp minutenn : "Amañ Skinva Breizh Dieub", deuit holl er bagadoù stourm Charles de Gaulle h.a. Eus pelec'h e vez skiniet ? S.A.D.E.D. hepken a oar met ne lavar nemet pemp munutenn a-raok ma vege skiniet an a badenn.

Ur beurevezh ez eus bet kavet dindan ar Gwenn ha Du ur banniel triliv teir gwezh brasoc'h egetañ. Dindan ar Gwenn ha Du a lavaran - ~~areu~~ arouez an trec'h - ar pezh en deus talvezet da Abenez evit ur ganaouenn "Ar Banniel Fall". Piv en deus e lakaet ? S.A.D.E.D. a gavo.

Bep beure ez eus kentelioù eus 9 eur betek 10 eur I/2 pe II eur. Da II eur e vez graet ur brezegenn. E-pad an abardaez ez aer da vale er c'hoadoù tro-war-dro. Ober a reomp c'hoarioù a bep seurt.

Goude kcan e vez un nozvezh laouen gant charadennoù, kanaouennoù c'hoarioù h.a. Ar vugale vihan o deus ur berzh bras.

Ar c'hentelioù e S.A.D.E.D. a zo plijus kenañ.

Ar film "Tortig ha Balibouzig" a zo bet luc'hvannet gant an Itra Galbrun. Un oberenn n'eus nemeti eo gant skeudennoù ha livioù flamm. An holl dud a estlamm dirazañ.

Pedet omp bet gant kelc'h keltiek Langoned (Abati) evit dañsal. An ne nozvezh a zo bet plijus.

En ur zistreiñ eo bet prenet gant ar baotred peder boutailhad chouchen. Gwelet e veze an dud o ruilhal dindan ar gweleoù !

E-lec'h ar c'hoari "tipotiñ" a zo ur ger gall ez eo bet ijinet ur ger

ger nevez. Livit kavout anezhañ ez eo bet lakaet silabenoù en un tok.
 Hag evelse hon eus bet: " ANIELLA ". Ha bremañ e vez antolet kalz trasu
 En hevelep doare eo bet kavet: " VLEBENNED " e-lec'h : " VLEBENNED ".

Ar vrezhonegerien buhezekoc'h eget biskoazh a zo o vont a gammedoù
 bras war-du an dieubidiezh.

TANGI L. BAIN

15 vloaz

AR BARRINN FALL

Diouzh ar beure 'z eus bet gwelet
 E-pad an noz ' oa bet lakaet
 A-istribilh un tamm pilhenn
 'Vit lakaat trubuilh eh hor penn.

Tri liv 'oa d'an tamm pilhenn
 Unan 'oa lous, laer 'oa gwenn,
 Unan 'oa glas, pezh a dalv fall,
 Unan 'oa ruz ' vel ar gwad call.

Liv enta 'zo bet an hailhon
 Un den ganas, glas e calon .
 Marteze ur gall ruz e benn,
 Ne unan klañv a vefe gwenn.

Avioc'h c'hwi; soñjit ervat
 A-barzh d'ho botoù lufnañ ast,
 Gwrit gant an tamm pilhenn; c'hwi oar!
 Goude deoc'h bezañ gwraet gant hoar;

ABENNED

VA UNANIK

Ur paourkaezh krennard on,
 Va unanik,
 Trist va c'halon
 Hep ur c'haredig -
 Pep tra em eus bet
 War ar bed-mañ

Da vignonedBEURE

Deiz hañvus ,
 Nor varzhus ,
 Heol beure .

Plac'hig e gwenn ,
 Kalon laouen ,
 Evel gouerenn.

Paotr kalonek ,
 Barzh birvidik ,
 Ha kizidik .

Kalon ankeniet ,
 Hag ene doaniet ,
 Kleier ar beure .

Doue d'ho tiwall !
 Karantez am doug ,
 D'ho toujañ leal .

Ivona KONAN
 (Perroz, Eost 1961)

Met me am eus c'hoant
 Ar garantez c'hwekañ -
 Ur garantez, ur garantez

A Dalv un añ
 C'hoant da glevout
 Komzoù ar re flourañ,
 C'hoant da glevout

Unan ' lâroust :
 " Dal va c'harantez "
 " 'Vit noz ha dez ! "

Va c'hlevit, va c'hlevit mat va zud kaezh,
 Lavarit de'i
 Donet davedon
 Me gar ane'i
 Pedet 'm eus don,
 An neñv 'm eus pedet,
 'Vit kaout unan
 Unan da garet ...


Troet diwar an amerikaneg

" LONELY BOY "


gant Paol ANKA .

T O P P - P E N N



Kennozadur



Sk. I



Sk. II



Sk. III

SK. I _____ Ober 4 skouerenn eus a ha b.

Gant an 4 pezhir dont a benn da sevel ar groaz c'hresianeg. (Lez e c'heller implij ar pezhioù war o zu mat pe o zu gan.)

SK. II _____ Rescort hent kemer evit ober en ur wech hepken an dro ,da lavarout tremen e pep lec'h hep sevel ar c'hilion ?

SK. III _____ Ur garezenn a gleiz, pere eo ar pezhioù a stumm heñvel-mik ouzh A, B? ha K?
Garmenig

O verzhañ skouerenoù TARZH e Ero-Wened an deiz all, ur paotr yaouank en deus lavaret deomp:

TARZ-AR-DARZ, PE 'CHAL PETRA EO TARZH ?

(Pe ' chal= en em c'houlenn a ran)

Gwion

K A N - B A L E " N O V E N O E "

NEVENOE ! (3 gw.)

Skoulmet mat eo hirie - chadenn ar c'hoskored !
Kousket noz - kousket de(iz) - kalon ar
Vretoned !
Nag eo du an noz dindan wask ponner ar Gall !
Disoñjet krenn eo o anv !
Nag eo du an deiz d'ar Gadourion-bro dibal...
... liv a sammo bir ha kleze ?

NEVENOE ! (3 gw.)

Met un deiz e c'hwezho **avel** menez Arre !
Met un deiz e luc'ho tan-gwall menez Kerne !
Ra vo dihunet nerzh ha lorc'h an Argadour
E skeud ponner ar Gwenn ha Du !
Ra vo dismantret korf ha gwad an Enebour !
N'eus forzh penaos e vo ludu !

NEVENOE ! (3 gw.)

Skeud an trec'h war o dremm, ho pugale ya
d'ar brezel !
Dorn kalet - lagad lemm, stagañ raint war-
du an avel !
Gant tan ar serr-noz, e don o daoulagad
War ar c'huzh-heol ez aint fenozh !
Gant youc'h ar re gozh war leurenn an argad,
Ar re yaouank varvo fenozh !

NEVENOE ! (3 gw.)

GLENN MOR



Un tammig disheñvel diouzh an niverennoù
kent eo pempvet niverenn **TARZE**.
Savet eo bet e-pad Kamp ar Vrezhonegerion
e Langoned.
Setu perak ne vezo ket kavet e-barzh
kendalc'h "Istor Owen Glenn".

